

# BRO GOZH MA ZADOÙ

KAN BROADEL BREIZH  
HYMNE NATIONAL BRETON



Kan-broadel Breizh eo **Bro Gozh ma Zadoù**. Heñvel eo e don ouzh hini Kan-broadel Bro Gembre, **Hen Wlad Fy Nhadau** (Bro Gozh hon Tadoù). Kan-broadel Kerne-Veur, **Bro Goth Agan Tasow** a vez kanet ivez war an hevelep ton. Souezhusoc'h, kanet e vez an ton mañ ivez gant ar Gashied, ur boblad a vev e biz Bro indez.

E 1898 e oa bet sonet evit ar wech kentañ hag abaoe eo chomet ton ar Vretoned dre ar bed a-bezh. Staget e vez gantañ e meur a zegouezh: gouelioù a-bep seurt, krogadoù sport... Kanet e vez bremañ gant skipailhoù mell-droad 'zo e derou ar c'hrogadoù.

Ur gevredigezh eo **Poellgor Bro Gozh ma Zadoù**, he c'hefridi o vezañ kas war-raok brud Kan broadel Breizh.

Ezel oc'h eus ul laz-kanañ, ul laz-seniñ? Entanet oc'h gant ar sonerezh ha gant Breizh? Deuit da labourat ganeomp!

Le **Bro Gozh ma Zadoù** est l'hymne national breton. Son nom signifie en breton "Vieux pays de mes pères". Sa mélodie s'inspire de l'hymne national du Pays de Galles, **Hen Wlad Fy Nhadau** (Vieux Pays de mes Pères). L'hymne de Cornouailles, **Bro Goth Agan Tasow**, l'équivalent en cornique, reprend lui aussi l'air de l'hymne gallois. Enfin, on le retrouve également chez le peuple khasi dans le nord-est de l'Inde.

Joué pour la première fois en 1898, il est resté depuis cette date, l'air des Bretons du monde entier. Il est entonné dans de nombreuses manifestations culturelles, sportives et festives. Des équipes de football bretonnes l'utilisent désormais avant les matchs.

Le **Comité Bro Gozh ma Zadoù** est une association qui a pour mission de diffuser et de promouvoir l'hymne national breton, **Bro Gozh ma Zadoù**.

Vous êtes membres d'une chorale, d'un orchestre, un passionné de musique et de Bretagne, vous pouvez nous rejoindre.



**Poellgor Bro Gozh ma Zadoù**

BP 70 815 , 56108 An Oriant / Lorient Cedex  
Plg/Tél. 06 32 29 79 29

[gouelarbrogozh@aliceadsl.fr](mailto:gouelarbrogozh@aliceadsl.fr)

[www.brogozhmazadou.com](http://www.brogozhmazadou.com)

© Mikael Bodlore-Penlaez - [www.geobreizh.com](http://www.geobreizh.com)